



DIVERRA



EUS AR BASION



A VEZO C'HOARIET

e

KASTEL

hag e

PLEYBEN

e

1924



BREST

Moullerez ru ar C'hastell, 4.

1924



FB
891.
682
Div



10765

68
891
682
DIV

DIVERRA EUS AR BASION



A vezo C'hoariet

E KASTEL

HAG E PLEYBEN

1924



BREST

Moullerez ru ar C'hastell, 4

1924

EUR GER ARAOK

Va c'haret en deus ha maro eo dre garantez evidoun.
Sant PAOL (Galat. II-20).

Sant Paol ar Groaz, diazezour Urz ar Basionisted (1694-1775) a c'hounezas eun niver hep kount a eneo da Zoue en eur brezeg dalc'h mat ar Basion.

Hor mennoz hag hor c'hoant d'eomp-ni, en eur zisplega Pasion hor Salver, war ar c'hoarilec'h, eo ive lakaat hor breudeur, da sonjal muioc'h er garantez en deus Jezus evidomp, evit ma kresko evelse o c'harantez evitan.

O karantez hep muzul va Doue!, a lavare Sant Paol ar Groaz, hi eo he deus lakeat ac'hanoc'h da c'henel en eur c'hraou! Da vervel evidoun war eur groaz! Ha da jom ganin bepret e Sakramant an Aoter.

Ia, a lavar Jezuz e-unan d'eomp, ho karet am eus dreist pep-tra. Gwelit: pellaet oun dioc'h va zad ker mat! Dioc'h va Elez ker koant, ker sentus! Dilezet am eus va baradoz ken dudius, evit dont da veva en ho touez. — Ho pec'hejou a c'houlenne kastiz: hag abalamour m'ho karan, eo falvezet ganin, en em ginnig evel eun oan d'am zad, evit terri nerz e gounnar ha goulen ho pardoun! Ho karet am eus muioc'h evit va enor; gwelit: penaoz oun bet disprijet, gwapaet, breset dindan an treid du-ze e lezvarn Kaifas hag e lezvarn Pilat. Gwelit ar peza zo great d'in: sonjit er javedadou, er c'hraïnc'h, e sae ar re ziskiant, er foetou, er spern, er groaz. Ha gouzanvet am eus an oll boaniou-ze evel an dismeganz-se dre garantez evidoc'h. Ho karet am eus muioc'h evit va buez. Roet am eus anezi evidoc'h « ha n'eus ket testenï vrasoc'h a garantez eget rei ar vuez evit an hini a garer ».

Ho karet am eus — ho karet a ran.

Ha c'houi? ha va c'haret a rit?

Penaoz e fell d'eoc'h diskouez ho karantez?

NIHIL OBSTAT.

Jacques GORET,

Chan. tit. cens.

IMPRIMATUR

Quimper, le 8 mars 1924.

A. COGNEAU.

Diocèse de
Quimper & Léon

Document numérisé en 2016

AR PEZ C'HOARI

Ar Basion a vezo c'hoariet, ar bloaz-man, e Kastel, n'eo tamm henvel oc'h an hini, a oa bet displeget ar bloaz tremenet. Hou-man a oa rannet, lodennet en XII arvest; ha goude pep arvest, e chomed a zav, dek minut pe eur c'hart heur, evit trei ar stalafiou (coullisse), sach a tu d'an taolennou.

Ar wech-man e vezo c'hoariet hep distag ebet, azalek ar penn kenta (hor Salver o lavaret kenavezo da vignouned Bethanii), betek ar mare ma vezo barnet Jezuz d'ar maro gant Kaifas hag ar Farizianed. E kreiz e vezo paouezet epad eur c'hart heur. Ha goude e vezo kroget el labour adarre evit mont tre betek penn.

Ne vezor ket inouet, rag ne vezo ket amzer da jom da zrebi sonjou, an taolennou a dremenno an eil warlerc'h eben, hep ehan, ha goude unan gaer e teuo unan all kaeroc'h c'hoaz.

Arabad e vije kredi eo skrivet en Aviel kement a zo er pez-c'hoari. Kalz traou a zo tennet eus levriou ar re o deus savet histor ar Juzevien, ar romaned en amzer hor Salver muia karet; ha kalz traou all a zo bet reket gant an oberour e-unan.

AL LEUR C'HOARI (Théâtre)

N'eo ket kel ledan hag ar mor etre Rosko hag enezen Vaz, met bras awalc'h eo evit lakaat meur a garrad « Brokoli » — 36 troatad he deus eus ar Sav-Heol d'ar C'huz-Heol — ha 49 troatad eus an Hanter-Noz d'ar C'hreiz-Teiz. En tu araog, ez eus eur ru, ledan awalc'h evit lezel « eur c'harr bras dre dan » da dremen. Azioch al leur-c'hoari ez eus eun doenn. N'eo ket great gant mein glaz, met gant taolennou a zo bet livet, en eun doare dispar, gant unan a anavez e vicher.

Dournet mat eo ive ar c'halvez en deus labouret ar c'hoad ha lakeat an « theatr » ploumm en e zav.

Pa vezo elumet ar goulou ruz, glaz, melen ha gwenn, an ti-ze a vezo eun dudi evit al lagad.

C'HOARIERIEN — C'HOARIEREZED

Ouspenn 200 int: a bep oad, a bep vicher. Lod a zo tadou a familh, gwenn o bleo, lod all bugale vihan n'eus ket c'hoaz dek dervez abaoe m'o deus desket bale o-unan. Holl int distagellet mat, ha kalz anezo ma karjent e c'helje beza alvokaded dispar. Met gwelloc'h e kavont chom, e Kastel, da zisplega « ar Basion » d'ober vad d'o c'henvroiz, d'o lakaat da garet muioc'h-mui hor Salver ker karantezus! En e hano bennoz ha trugarez d'ezo. Doue a zigollo anezo, eun deiz, en e varadoz.

DILHAD

An dilhad a zo nevez-flamm, griet ha perlezennet int bet gant kemenerezed o deus ijin leiz o daouarn, bolontez vat leiz o c'haloun, ha n'o deus ket bet damant d'o skuider na d'o amzer. Great o deus o labour evit Jezuz! Ha gouzout a reont ne vez netra gollet eus ar pezh a rer evitan! D'ezo ive hor gwella bennoz gant hor brasa trugarez!



AN DIVERRA

EUZ AR PEZ A ZO E PASION KASTEL

ARVEST KENTA

Ar goel pe ar ridoc'h a zav. Gwelet a reomp Jezuz hag an Ebestel e kichen ti Lazar, Martha ha Madalen e Bethanii. Lavaret a ra bennoz Doue d'ar re-man evit an digemer ker mat o deus great d'ezan. Lazar hag e c'hoarezed a zo glac'haret, o sonjal ema Jezuz, o vont da bellaat evit mat... En eun taol kount, Mari a zigouez, gant ar gragez santel. Pebez komzou tener e lavar Jezuz d'e vamm! Pebez karantez he deus e vamm evitan! Falvezout a ra d'ezil mont gant he Mab d'ar boan, d'ar maro! Kaloun an holl, nemet hini Judas, a zo boukeat. Jezuz a bella gant e ebestel hag ar gragez santel. Mari, evit senti oc'h he Mab, a jom e ti Lazar, e Bethanii. Kerkent ar goel kreiz a zo savet. Hegleo kear Jeruzalem a dregern gant an dud o kana. Pell e seblantont beza da genta, met tostaat a reont buhan, ha dizale, ar vugale a zeu, dre ar ru zo en tu deou, brankou palmez en o dourn, raktal goude ar merc'hed, gnto pallennou, da deuler dindan treid hor Salver, e kreiz Jezuz gant e ebestel, e zourn savet evit binniga; — ar wazed a zo warlerc'h, o kana a bouez penn meuleudi da Jezuz evel ar vugale hag ar merc'hed.

DISKAN

Ton: AN AOTR. MAYET pe BACH.

Meuleudi da viken

D'an Hini ' zeu warnomp da ren!

A bouez penn kanomp oll d'hor roue!

D'hor Mestr ken brudet

« Enor! bevet!

Ar Mesias, ar Profed!

Bevet Jezuz gwir vab Doue!

I

Ia ra zeuio pep hini
Da rei gloar ha meuleudi:
D'ar Salver karantezus,
D'ar profed ker galloudus,
En deus, d'an dud, digaset
Ar peoc'h hag an eurusted!

II

E gomz a suj an avel
Hag a ra d'ar mor tevel;
E c'her ' bella ar c'hlenved,
'Frealz an ene glac'haret:
A sav kerkent d'ar vuez
Ar c'horf ' oa skournet er bez.

III

Ma vezo kaer da welet,
Ha bouk e hent 'vit kerzet:
Taolomp warnan bokedou
Ledomp warnan pallennou:
Met dreist-holl greomp d'ezan ren,
War hor c'haloun da viken!

Oh! taolenn dispar! ar vugaligou, gwenn evel elez,
en em vod en-dro da Jezuz. An ebestel a glask o
fellaat. Met hor Salver a lavar d'ezo: « Lezit ar vuga-
ligou da zont davedoun ». Eur baotrezig a ginnig
d'ezan eul lillien. Jezuz a gemer anezi, en eur bedi
e vuia karet, da jom bepret glan ha dinam. Evit dis-
kouez o c'harantez d'hor Salver ar vugale a gan:

TON : Breizis Are Breizis, Arvor, An Aotr: MAYET.

DISKAN

Da Jezuz hor brasa mignoun
Holl karantez leal hor c'haloun.
Ha kanomp hirio a bouez penn:
« Meulet vô Jezuz da viken.

I

Lezit, a lavare, ar vugale vihan,
Da dostaat hep krena ha da zont davedoun.
An dud vras evelto, a zo dinam ha glan,
A zo ar re gonta, an tosta d'am c'haloun.

II

Gouzout ' ra omp dinerz, hon eus poan chom fidel,
Hag en deus dibabet, eun eal mat d'hon difenn:
« Kit, emezan, kuzit va breur, gant hoc'h askel,
« Ha chomit d'hen diwall, d'e henchha da vikenn.

III

Met malloz d'an dud fall, ' ro dourn d'an droug-spered,
O klask war an douar e zougen d'ar pec'hed.
Gwelloc'h ' vije d'ezo ne vijent ket ganet,
Pe er mor doun dindar eur mean milin beuzet.

IV

Karomp eta bemdez muioc'h-mui hor Salver,
Karomp, a greiz kaloun, Mari e vamm dener.
Meuleudi da Jezuz! meuleudi da viken
Ha d'hor profed ker mat, buez hirr ha laouenn!



Ar farizianed a zo droug enno « Bouzaret omp gan-
to; petra? emezo, peoc'h e vezo? ». « Ma tavont, a res-
pount Jezuz, ar vein o-unan a grio Ha n'ho peus
ket lennet ar skritur? Pe ankounac'heat ho peus ar
pez ho peus lennet! « eus ginou ar vugale eo deut
d'in ar veuleudi ».

Ar varc'hadourien a oa en em lakeat, d'ober o
marc'had, e goeled an templ, a zo kaset er meaz a
daoliou skourjez. Gwarizj ha kounnar ar farizianed,
o doa fermet al leac'h-se d'ar varc'hadourien, a zo
Jeun-barr. Goulenn a reont digant Jezuz, piou en deus
roet d'ezan ar galloud, d'ober ar pezh a ra. « Mar d'eo

bet roet d'eoc'h gant Doue, hen diskouezit en eur ober miraklou ». « Miraklou? eme hor Salver, lakeat e vezo unan dirazoc'h; diskarit an templ-man (e gorf) ha tri dervez goude her zavin en-dro ». Hag en eur zistrei warzu ar bobl e lavar d'ezan: « Ar farizianed a zo azezet war gador Moizez: grit ar peñ a zeskont d'eoc'h met ne rit ket ar peñ a reont. » Mar doa kaer taolenn ar vithale, hou-man a zo spountus. Jezuz ar vadelez, ar garantez hep muzul, a daol e valloz war ar farizianed. E zaoulagad a lugern evel skodou tan. « Blenerien dall ma 'z oc'h, tremen a rit ho tour dre ar zil, gant aoun da lounka er c'hibuen, ha ne rit van evit lounka eur c'hanval... henvel oc'h eus beziou gwennet, kaer da welet a ziveaz, met an diabarz a zo leun a eskern dizec'het hag a vreinadurez euzus ». Ar Farizianed a zo mezek, pellaat a reont an eil warlec'h egile. Annas da ziveza. Jezuz a c'hourc'hemen da Ber ha da Yan, mont e kear, da bourchass ar peñ a zo red evit lida ar pask, ha goude ez a, gant an ebestel hag ar bobl er penn all d'an templ evit pedi e Dad a zo en nenv.

En eun taol ar c'hoarilec'h a deu da veza ruz. Satan eo a zo aze, savet eus punz an ifern, gant e bennad bleo ruz-tan hag e gerniel gwenn kann. Eur gasorñ spountus en deus oc'h Jezuz, ha laouenn eo o sonjal er gounnar, a garg kaloun ar Farizianed hag hini ar varc'hadourien. Ar re-man, her skoazello, en eun doare dispar, da gass Jezuz d'ar maro, d'heñ lakaat da zisken en douar, ha dizale ne vezo hano ebet anezan etouez an dud!! Fazia a rit diaoul fall! — Kaifas, ar beleg bras, a zigouez. En em glevet a ra gant ar varc'hadourien. Gourc'hemen a ra d'ezo mont en holl diez e kear, da douella ar bobl, da zistaga e galoun dioc'h Jezuz, da voda ar muia ma c'hellint a dud, ha d'o digass da lezvarn Pilat, evit goulenn a bouez penn maro ar galilean. Dalhan, mestr ar varc'hadourien, a anavez mat Judas. Gouzout a ra ne varc'hato ket, evit gwerza e vestr, ma vez kinniget arc'hant d'ezan. Hen digass a raio da lezvarn ar Farizianed.

Paour keaz Judas! diaoul an arc'hant eo roue e galoun! Sevel a ra evitan eun tron alaouret e kreiz fourn bero an islonk.

II ARVEST

Ar Farizianed a zo bodet, e sal vras al lezvarn. Pebez kasoni a zo o virvi en o c'haloun! Jezuz a rank mervel! Gedal a rer Dathan. Hirr e kaver an amzer. Digouezout a ra gant Judas. An abostol trubard, a zo mall gantan da starda, en e yalc'h, an arc'hant en devezo evit e dorfed! Ha gwelet a rer arjezan, o werza e vestr, e vrasa madoberour evit 30 diner! Daou Juzeo kalonek, Joseph a Arimathii ha Nikodem, a zav o mouez evit difenn Jezuz. Pellaat a reont gant donjer dioc'h barnerien ken displeal. « Met, eme Annas, hor mennoz a zo hag e vezo bepret: Jezuz a Nazareth d'ar maro! » Hag an holl farizianed, en eur vouez, en eur sevel o dourn, a adlavar evel eun hegleo sentus: Ia, d'ar maro!

Judas, an trubard, a zo o vont d'ober ar pask, gant Jezuz hag an ebestel, d'ar gambr lid, da lakaat Doue, da ziskenn en eur galoun a zo en em werzet d'an droug-spered. Hag e gwirionez, Satan a zigouez, da lavaret d'ezan: « Diwallit da vont eneb ho ker, ar bromesa ho peus great, rag neuze emaoch kollet ». — « Piou a lavar ar dra-ze? a c'houlenn Judas. — Me ho Mestr — eme Satan.

Ha Judas, an abostol, dibabet gant Jezuz etouez kant mil all, a sento ous roue an ifern!

III ARVEST

Jezuz, er Gambr lid, o sevel Sakramant an Aoter

Per ha Yan, sentus ous ho Mestr, a zeu da bourchass ar peñ a zo red evit lida ar pask. En em gaout a reont gant Mark, perc'herñ an ti a zo dibabet gant Jezuz. Mark a zo laouenn da rei digemer d'hor Salver, da ziskouez e anaoudegezh vat, d'an Hini en deus roet d'ezan ar gweled.

Kerkent ar goel kreiz a zay, hag e weler an Elez,
o renka an daol evit ar pask, en eur gana kantik ar
Baradoz:

I

Jezuz peger bras ve
Plijadur an ene,
Pa vez e gras Doue
Hag en e garante.

III

Breudeur ker an douar,
Oh! pebez joa hep he far!
A zo ous ho kortoz
Eun deiz, er baradoz.

II

Berr ' kaver an amzer:
Hag ar poaniou dister,
O sonjal deiz ha noz,
E gloar ar Baradoz.

IV

En oll boaniou kalet,
A gorf pe a spered,
Sonjit 'ta deiz ha noz
E gloar ar baradoz!

P'eo echu o labour hag o c'han ganto, ar goel
kreiz a gouez. Jezuz hag an ebistel a zeu dre an
tu deou. Araok sevel sakramant an Aoter, hor Sal-
ver en em laka da walc'hi o z Reid d'an 12 abostol.
Doue daoulinet o walc'hi treid e grouadurien! Pe-
bez keñtel! Lavaret a ra freaz da bep hini e ran-
ker beza izel a galoun evit kommunia. Epad an
amzer-ze an elez a gan:

TON an Aot. MAYET, pe *Elez ar Baradoz.*

I

Jezuz a zo Mab Doue! e palez an Dreinded;
An holl Sent hag an Elez, dirazan daoulinet:
O c'halonou o tridal gant ar joa, an dudil!
Da heul o zeleñnou aour a gan e veuleudil!

II

Jezuz a zo Mab Doue! eur groaz vò e wele,
'Lec'h m'her stago da vervel tachou ar garante.
Ha diwarni hep ehan, e skuilho dre ar bed,
Ar gwad sakr ' ro d'an ene, an nêrz hag ar yec'hed.

III

Jezuz a zo Mab Doue! Kaout a rer sklerijen
Er eur bedi anezan, en eur heuilh e lezen,
An dud fall ' glask hen diskar. Met kaer, kaer o dezo,
Jezuz a vezo karek, war ar bed a reno.

IV

Jezuz a zo Mab Doue! Eun Doue mat meurbet.
A gemer war e galoun, ar pec'her glac'haret.
Pebez eurusded dispar! pebez kurunen gaer!
A c'hortoz en e balez, e wir dest, ar merzer!

V

Jezuz a zo Mab Doue! dirazomp daoulinet,
Ema o walc'hi an treid, d'an Ebistel mantret:
Komprenit e garantez, komprenit e gentel.
Ar galoun 'vit mont d'an nenv, a rank beza izel!

Selaouit mat ar pez a lavar Jezuz da Judas: « Pe-
ger kaer eo treid an abostol, treid an hini a gass,
d'e vreudeur, kelou mat an Aotrou Doue! Met treid
an dud fall a zo ruz-gwad, dougen a reont d'ober
an droug, da rei taol ar maro ». Spered Judas
n'ema ket eno, sonjal a ra bepreñ en e arc'hant!

Gwalc'het eo an treid. « Ha breman, eme Jezuz,
ez an d'ober, ganeoc'h hag an holl dud, eun em-
gleo nevez. Kemeret a ra bara, sevel a ra e zaou-
lagad warzu an nenv, ranna a ra anezan dre an
hanter, hag en eur her rei d'e ebistel e lavar: « Ke-
merit ha drebit: an dra-man eo va c'horf a vezo
lakeat d'ar maro evidoc'h. » Epad m'ema an Ebes-
tel o kommunia an Elez a gan:

TON : *Adoromp holl !*

I

Adoromp holl; dindan spesou ar bara,
Jezuz Doue. Krouer an nenv, an douar:
O Ebistel eurus! c'houi eo ar re genta,
A zreb korf ho Salver; pebez eur vad dispar!

II

Tra burzudus! evit ma c'hello maga.
E vugale! Doue a jom er bara.
O Ebestel eurus! C'houi a vir ho Toue!
Beo mat en ho kaloun, ha Mestr en hoc'h ene!

Jezuz a gemer ar c'halur, a vinnig anezan hag
a ro da eva d'an holl Ebestel. Epad ma kan adarre
an Elez.

TON : Kantik pajen 64, *Va Jezuz, va Doue !*

I

O gwad sakr va Doue! ia c'houi eo ec'h adoran!
Rag c'houi elec'h ar gwin, a zo er c'halur breman!

DISKAN

O va Doue! pebez karantez!
Rei, evit an dud, ho kwad hag ho puez!

II

Nan, eus ar garantez, n'eus merk brasoc'h, o Salver
Eget skuilha ar gwad, 'vit an hini a garer.

III

Ha c'houi ' ro hoc'h hini, gant ar berad diveza!
Evit ho mignoned, 'vel ho pourrevien krisa!

IV

O Oan karantezus! ho kwad sakr eo ar vuez
A zigass d'an ene, sklerijenn ha santelez!

V

Sevel a ra d'an nenv, diskenn a ra d'an douar!
O lakaat tomm-bero, an holl galonou klouar!

VI

Komprenit 'ta breudeur, peseurt droug eo ar pec'hed,
Pa laz Jezuz ker mat, en deus kement ho karet!

Jezuz a ro d'anaout d'e ebestel e vezo gwerzet
gant unan anezo. Judas a gren. An ebestel a zo gla-
c'haret meurbet, ha goulén a reont an eil goude egile
« Mestr daoust ha me eo? ». « Mab an den, eme hor
Salver a ia, evit gwir, warzu e Dad, evel m'eo skri-
vet, met gwaz aze d'an neb e werzo, gwell e vije
d'ezan ne vije biskoaz ganet ».

Judas a c'houlén d'e dro: « Mestr, ha me eo ».
« Hel lavaret ho peus ». Ha Judas a bella.

Jezuz hag an Ebestel a zav dioc'h taol, a zeu ekreiz
ar c'hoari-lec'h, hag eno Jezuz a ro d'anaout da Ber
hen nac'ho teir gwech. « Me ho nac'h aotrou? Trei
kein d'eoc'h, Mestr karet? Biken, kentoc'h ez afen
ganeoc'h d'ar prizoun, d'ar maro! » Per en deus ka-
loun vat, met re a fizianz en deus en e nerz e-unan.
Goude beza diskleriet d'e ebestel, ema o vont da veza
lakeat e renk en dorfetourien, ha trugarekaet e Dad
a zo en nenv, Jezuz a ia da bedi da liorz Jethse-
mani « er beden, emezan, e kaver ar sklerijenn hag
an nerz ».

IV ARVEST

Liors Jethsemani

Judas a zigouez gant ar Farizianed, ar varc'ha-
dourien hag ar soudarded. Mont a reont d'en em
guzat, er c'hoad a zo en tu kleiz, evit gedal ma c'hel-
lint ober o zaol diaoulek, chadenna Mab Doue. Ker-
kent ha mar deo eat ar re-man er c'hoad, e weler
Jezuz o tont gant e 11 abostol. Peger glac'haret eo
ar Mestr karet! « Anken ar maro, a zo war va spe-
red,... va mignoned, feiz ho peus, met pedit va zad
da greski c'hoaz ar feiz-se », gant aoun na golloc'h
kaloun, o welet Mab Doue, ker gwallgaset! Lavaret
a ra d'ar ebestel mont en tu deou, da Ber, da Jakez
ha da Yan chôm gantan.

Ha breman Jezuz a c'houzanv eur boan spountus.
Gwelet a ra warnan, an holl dorfefjou, an holl bec'he-
jou!

« Oh! pebez samm! ar blasfemou! Ar viltansou! Ar sakrilachou! « ha dindan ar zamm-ze, Jezuz a zo flastret hag a gouez dan douar! Met pedi a ra hep ehan, ha lavaret a ra d'e Dad: Ra vezo great ho polontez, ha nan va hini-me ». — Mont a ra beteg e ebestel. Kousket int! — An eil daolenn a zo ker spoutus all. Gwelet a ra dirazan: ar foetou ploumm, ar sperrn hirr, an tachou lemm, ar groaz pounner; ema warnan holl boaniou an dud: poaniou ar c'horf, poaniou ar spered. Koueza a ra en-dro d'an douar evel maro!... Goude eur pennad e c'hell sevel ha dont adarre beteg e ebestel. Kousket int endro! Ha setu kerkent an drede taolenn: Poan ar galoun.

« Ia, eme Jezuz (en eur ziskouez e ebestel), int-i » a gousk, met Judas ne ra ket! Poania a ra, en em » skuiza a ra, evit kass ac'hanoun d'ar maro! Oh! » Judas! Judas! pegen digaloun oc'h! Goude ke- » ment a vad am eus great d'eoc'h!... Na niverus » eo, dre ar bed, ar re a gemer skouer warnoc'h, » ar re a zo dianaoudek evel doc'h! Tad! tad! daoust » ha bepret e vezin gwapaet? breset dindan an treid! » Setu ar boan grisa evitan... poan ar galoun a wel an dud oc'h ober fae eus he c'harantez. Jezuz a c'houzanv anezi evit savetei an holl. « Tad! Tad! ma n'ho peus mui truez ouzin-me ho Mab, bezit truez, da vihana, ous ar bec'herien. Skoit warnoun met savetai anezo ».

Eun eal a ziskenn, evit e frealzi, e gennerzi,
Kana a ra:

Doue ken glac'haret! Oh! eun Doue o ouela!
Hag e wad gant ar boan, eus e gorf o koueza!
Pa 'z eo ker kriz an dud, Mestr hoc'h eal a jom fidel!
Evidoc'h me ho ped, hel lezit da vervel.

II

Salver Jezuz! Digass a ran d'eoc'h bennoz ho Tad,
Evit ma chomoc'h krenn en diveza stourmad!
Rag deut eo ar mare, da c'houzanv an holl boaniou.
A dle prena an dud, digeri an nenvou.

Gantan Jezuz a zo konfortet. Sevel a ra ha distrei a ra beteg e ebestel. « Alo, emezan, savit, va mignoned, an hini en deus va gwerzet, n'ema mui pell. » Hag e gwirionez, gwelet a rer Judas e penn ar soudarded, en tu kleiz.

An abostol digaloun a bok d'e vestr, hag a werz, dre pok ar garantez, an Hini en deus great d'ez n kement a vad! Ar soudarded a zo stlapet d'an douar, pa c'houlennont Jezuz a Nazareth. Per da genta a zifenn hor Salver, a droc'h skouarn Malkus, gant eun taol kleze, met goude, pa wel eo chadennet Jezuz, e pella ive gant an ebestel all. Hor Salver a zo kaset raktal da lezvarn Annas. Per ha Yan a zeu en dro, war ar c'hoarilec'h. An daou abostol a zo glac'haret meurbet, tec'het a reont en eur ouela!

Judas a zistro ive d'al liorz. Ar rebech a grign e ene. C'hoant en deus da welet ar pezh a vezo great da Jezuz, ha mont a ra er meaz d'ar red.

Ha goude e weler ar gragez santel hag ar Werc'hez o tont da Jethsemani. Paour keaz Mamm! pebez glac'har eo hec'h hini! Poket a ra d'an douar a zo bet glebiet gant daelou ha gwad he Mab Jezuz!

V ARVEST

Jezus dirag Annas

Pa zav ar goel, ar beleg bras koz, Annas a zo azezet, e kreiz ar c'hoarilec'h, an tan en e lagad, ar gasoni en e galoun. Mall en deus da welet Jezuz ha droug bras a zo ennan, abalamour ne zeu ket bihan awalc'h. « Eur minut o c'hedal, en doare-man, a zo hirroc'h evidoun eget eun heur ». — En eil diviz Judas hag ar Farizianed a zo bet e liorz Jethsemani a zigouez. « Great eo al labour ho poa fiziet ennomp, a lavar unan anezo, ar profed a zo d'eomp ». Pebez levenez evit Annas. « Judas, emezan, hoc'h hano a vezo skrivet, gant lizerennou aour war daolenn a eror an templ. Panevedoc'h biken n'hor bije gettel

lakaat ar galilean d'ar maro, araok goueliou Pask ». Met Judas en deus keuz. « Ne glaskan ket laza va Mestr! Oh! pebez malloz spountus e jachan war-noun ». Pellaat a ra.

Ar soudarded a zeu gant Jezuz. Annas a c'houlenn digantan peleac'h emañ e ziskibien? Piou en deus roet d'ezan ar gwir da brezeg? Ar galloud d'ober miraklou? An diaoul n'eo ket gwir? Oh! pebez kasoni a verv e kaloun ar Juzeo koz-se. Jezuz a lavar d'ezan eme deus prezeget atao dirag an holl, ha n'en deus lavaret netra e kuz, perag eta goulenn digantan peseurt kelennadurez en deus roet; n'en deus nemet gervel dirazan ar re o deus e glevet.

Ha setu Mizael, unan eus servicherien Annas da rei eur javedad da Vab Doue! Hag an holl da c'hoarzin. « Mar em eus komzet fall diskouezit din penaoz, eme Jezuz d'ezan gant dousder, ha mar em eus komzet mat, perag e skoit ganin? »

Annas ne oar mui petra d'ober. Gourc'hemen a ra, d'ar soudarded, kass Jezuz da lezvarn e vab kaer, ar beleg bras Kaifas. Per ha Yan a zigouez adarre. Aounik int atao. Klask a reont gouzout, petra a zo great d'O Mestr, met re zivezad en em gavont. Ar mevel Esdras a lavar d'ezo, eo eat Jezuz da balez Kaifas. An daou abostol a bella. Ne vijent ket bet gwall laouen mac'h o dije klevet komzou Esdras « gwenn villiget, emezan; peur 'ta e viot skubet, evit mat, diwar an douar ».

VI ARVEST

Jezuz dirag Kaifas

Kaifas ive a zo o c'hedal. Mall bras en deus, da welet e enebour touet, o tizec'ha war-ar-groaz. Ar Farizianed o deus aoun rag ar bobl. « Ar Bobl, eme Kaifas, a zo dall hag a vez kaset ha digaset evel ma karer pa vez renket brao ar geier d'ezan. Jezuz a

zigouez gant ar soudarded, ar farizianed all, an testou hag ar bobl. An testou faoz a gomz da genta. Tri int hag o zri, e tamallont Jezuz ar gwasa ma c'hellont. Komzou Gamaliel, an alvokad helavar, o tifen Jezuz, a ra vad d'ar galoun. Klevet a rer. Bartime, — an hini a oa ganet dall hag a zo bet pareet gant hor Salver, ha Lazar, a zo bet savet gantan a varo da veo, oc'h embann dirag ar Juzevien aheurtet ha digaloun, eo Jezuz: Mab an Doue beo. O daou e taoulinont dirazan, evit hen adori hag e drugarekaat.

Kaifas a c'hourc'hemen d'ar soudarded, o c'hass er meaz. Gamaliel e-unan a zo ereet ha kaset d'ar prizoun. Pellaat a ra en eul lavaret d'ar Juzevien: « n'eo ket barnerien oc'h, met bourrevien ». Jezuz a rank mervel. Kaifas, en e zav, war gador Moizez a c'houlenn digantan. « Ha beza oc'h ar C'hrist Mab Doue ». « Hel lavaret ho peus, eme Jezuz, bez'oun ar C'hrist Mab an Doue beo ». Ar beleg bras oc'h egari muioc'h-mui, a rog e zilhad, en eur ziskleria: « Blasfemet en deus. Peseurt kastiz a zo dleet d'ezan? » Hag an holl, en eur vouez, a respount: Ar maro! ar maro!

Ar varnerien a zistro da zal vras al lezvarn. Jezuz a zo kaset d'ar prizoun.

Diou blac'h Kaifas: Agar ha Sara a gav yen an amzer. Ober a reont tan er porz, ha gervel a reont Malkus hag ar soudarded da zont da domma. Yan en em gav eno gant Per. Yan a zeu hep aoun, met Per ne gred ket tostaat oc'h an tan. Agar a ia d'e gerc'hat. An abostol a wel mat, n'ema ket etouez e vignoned, met elec'h pellaat raktal, e chom etal an tan. « C'houi a zo unan eus diskibien ar galilean, hoc'h anaout a ran mat breman a lavar Agar d'ezan. « Sellit 'ta, a gendalc'h Sara. Henman a oa unan eus diskibien Jezuz ». « Eun dra hag a zo sklear eo, a lavar ar soudard, dalc'h mat e tarempreded'h ar galilean ». Ha Per a nac'h e vestr beteg teir gwech. « Nan, me hen tou d'eoc'h, n'anavezan ket an denze ». Evel m'en doa diskleriet Jezuz d'ezan, ar c'hillog n'eus doa ket c'hoaz kanet diou wech.

Ema Malkus o vont da skei gant Per, pa zigouez Jezus, gant ar C'hantener, ar soudarded hag ar var-c'hadourien. En eur dremen e kichen e abostol, hor Salver a sell outan gant kement a vadelez, a garantez, mar deo rannet e galoun. Diroll a ra da ouela hag hen ober a raio beteg e varo. Per en deus eur gwir c'hlaç'har d'e bec'hed. Hor Salver a zo lakeat d'azeza war gador Kaifas. Mouchet eo e zaoulagad d'ezan. An dud fallakr ha digaloun a sko gantan, a ra d'ezan ar gwas ma c'hellont en eur gana:

DISKAN

Lavarit 'ta roue ken mat
Gant piou ho peus ar javedad.

MALKUS (*o skei*).

Ah! roue bras! roue dispar!
Dirazoc'h 'kouezan d'an douar.

DALHAN (*o skei*).

Lavarit c'houi a zo ken fur
Hag ober a ran plijadur.

SARA (*o skei*).

Gwelit hag allazik a ra
Ho c'hoar karentezus Sara.

Kaifas hag ar Farizianed a zigouez. « Petra a welan? Diskennit ar fallakr-se alese buhan, stlabeza a rit tron ar beleg bras. Alo 'ta bezit furoc'h ». Kaifas a c'houlén adarre digant Jezuz. « Mar d'oc'h ar C'hrist, hel lavarit d'eomp? ». « Eun deiz o deuió, a respount hor Salver, e weloc'h ac'hanoun-me, a wall gasit breman, azezet en tu deou da Zoue holl c'halloudek ». Pebez blasfem spountus, a lavar Annas, evit e gastiza, evel m'eo dleet ne 'z eus nemet ar maro ». « Ia, ar maro! ar maro! » a gri ar bobl. Lennet eo ar varnedigez. Jezuz a zo barnet dar maro. Met evel ar Juzevien, ne c'hellont mui, lakaat d'ar maro o-unan, hor Salver a zo kaset da lezvarn Pilat.

Ar bobl a ia gantan. Ar Farizianed zo o vont ive, pac'h en em gav Judas. « Petra a glevan? emezan, ha gwir eo ho peus barnet Jezuz d'ar maro? Pec'het am eus en eul lakaat, etre ho taouarn, eun den a oa direbech ». Judas a ziskouez kaout keuz d'ar pez en deus great. « Klask a rean terri nerz va c'hoant da veza pinvidik, hag ar c'hoant-se a zo krenvoc'h breman evit biskoaz. Malloz d'an arc'hant! en deus lakeat ac'hanoun d'ober va zorfed, Malloz d'eoc'h-hu! ho peus roet anezan d'in ». Digeri a ra ar yalc'h « sellit, emezan, ous ho 30 diner! gwelit penaoz e lugernont. Lavaret e vije e vijent skodoutan. Devi a reont ». Stlapa a ra ar yalc'h, eharz treid ar Farizianed. Ar re-man a zastum anezi, ha gant an 30 diner, a brenó park ar poder, a vezo hanvet: haceldama: park ar gwad. Judas chomet e-unan, a glev eur vouez o lavarét, hag oc'h adlavaret d'ezan evel er gambr lid « gwell e vije d'ezan, ne vije biskoaz ganet ». Mouez Satan eo. Krena a rer pa weler Satan e-unan, o tont beteg Judas. « E zaouarn a zo warnoun, emaoñ sammet gantan; ha pa gouezin en ifern, dirazoun-me, muntre Mab Doue, an holl dud daonet hag an diaoulou o-unan, a dec'ho evel spountet! » Ia, a gendalc'h an diaoul, bezit laouen Judas, va breur, e goeled an islonk, ekreiz eun tan ha ne vezo biken mouget, d'eoc'h eo ar gador genta! » Judas ne oar mui peleac'h ema, trei a ra warnan e-unan. Koueza a ra d'an douar. Madalen zeu. Klask a ra lakaat an abostol treitour, da vont, gant fizianz, beteg e vestr. Rag « Jezuz eo, emezi, ha Jezuz a zo ker mat ». Poan gollet eo. « Echu eo, daonet oun » a respount Judas. Ha mont a ra er meaz d'ar red, evel eun den diskiant.

VII ARVEST

Jezuz dirag Pilat

Ar Farizianed, ar bobl, ar soudarded a zeu gant Jezuz, da lezvarn Pilat. Ar gouarner a zigouez e-unan, gant e zaou vignoun, Festus ha Kuintus. Gwap

a ra da genta eus ar Juzevien; ar re-man a ziskouez d'ezan, n'eo ket c'hoarzin eo a glaskont, met maga ar gasoni a verv en o c'haloun. « Ma ne vije ket eun torfetour, n'hor bije ket hen digaset d'eoc'h ». « Ar pezh a zo gwasoc'h c'hoaz, eme Kaifas, hen-man a lavar eo roue ar Juzevien ». An dra-ze a vije grevus, e gwirionez, a ansav Pilat, kemeret an hano a Roue, a zo eun torfed bras meurbet, ha biken ne c'houzanvin kement-se ». Pilat a c'hourc'hemen da Jezuz, sevel en deleziou, tostaat outan. Ober a ra goulennou outan. « Ha roue oc'h? » « Hel lavaret ho peus, eme Jezuz, ia roue oun, deut oun er bed-man, evit rei testeni d'ar wirionez ». « Ar wirionez? ar wirionez? Petra eo? a c'houlenn Pilat en eur vousec'hoarzin, ha piou a c'helfe lavaret en deus kavet anezi. Ober a ra da Jezuz disken. Kerkent e klevet ar bobl o krial: d'ar maro! d'ar maro! Pilat a zo nec'het. Met pa glev Kaifas, o tamall hor Salver, da rei kenteliou fall d'ar bobl, adaleg ar Galile beteg Jerusalem, ar gouarnet a ro urz d'e gass da Herodez, a zo roue ar Galile. Ar Farizianed a zo droug bras enno. « Adarre eun dale, eme Kaifas, pebez krener! N'eus forz, d'eomp war o lerc'h ». Hag an holl a ia er meaz, en eur grial: « Ia, d'eomp war o lerc'h beteg palez Herodez ». Kerkent pried Pilat, Klodia Prokula, a zeu gant diou eus he mignonezed, Marsella ha Paola, ha diou sklavourez. Nec'het hag inkrezet bras eo gant an huvre he deus bet diwar benn Jezuz. Gervel a ra Pilat, ha dirazan e tispieg an huvre-ze. Evit gwir, klask a ra savetei Jezuz. Pilat a ro e c'her d'ober ar pezh a zo en e c'halloud. Met krener eo bet, krener eo ha krener e vezo. En ¹xi^e diviz e weler Judas ha Satan. Hen-man a ro da gredi d'an abostol fall, eo re vras e dorfed, e bec'hed, ha ne c'hell ket beza pardonet. Daou galvez a dreuz ar c'hoarilec'h gant kroaz Jezuz. Judas a wel anezo hag a gompren, ema e vestr o vont da veza staget oc'h ar groaz. Koll a ra pep fizianz, ha mont a ra d'en em grouga.



VIII ARVEST

Jezuz dirag Herodez

Herodez, ar roue diroll, a zo azezet o lenn. Laouen eo, pa glev, e tigass Pilat Jezuz d'e balez. Gervel a ra davetan pennou bras e rouantelez. Ar re-man a zeu kerkent: Kuza, Nabal, Hillel, Asfenez. « N'am-eus tamm kasoni ebet ous Jezuz, a lavar Herodez d'ezo, met mall am eus, d'anaout e c'halloud ha da welet e vurzudou ». Jezuz a zigouez gant ar soudarded, ar Farizianed hag ar bobl. Herodez a c'houlenn digant ar Juzevien, perag e teuont, gant hor Salver, d'e lezvarn. « Pilat a zigass anezan d'eoc'h, a respount Kaifas, rag dindan ho kalloud ema, evel an holl galileaned ». Ha setu ar roue d'ober goulennou ous Jezuz. « Ha klask a rit, e gwirionez, beza roue ar Galile? Mar d'oc'h roue, peleac'h ema ho rouantelez? ho mignoned? ho ministred? » Jezuz ne lavar ger, ne lavaro grik ebet, epad an amzer, ma vezo dirag Herodez. Ar roue en deus aoun araozan pa jom dilavar en doare-ze. Goulenn a ra digant hor Salver ober miraklou. Displega an huvre en deus bet, an noz diveza: netra. Lakaat bleuniou ha deliou da boulza war e walenn a roue: netra. Kreski ar bara; rei ar gweled da unan dall, trei an dour e gwin: netra, atao netra. Ar bobl a ra gwap, a c'hoarz. Ar Farizianed a c'houlenn ar maro evit Jezuz. Herodez a zav droug ennan. « Ne lavar netra, emezan, ha ne c'hell ober netra! hag e vije eun torfetour? nan, nan, n'eo nemet eun den hag eo troet e spered. Mar d'eo roue, e rank beza roue ar re ziskiant ». Hag ober a ra lakaat, da Jezuz, eur vantel wen¹, evit diskouez d'an holl, e kred eo diskiant an hini en deus pep skiant, pep furnez. « Salud, emezan, roue diskaret, pe roue an dud n'int ket c'hoaz ganet, beteg hirio ne doc'h nemet roue ar farserien ». Hag an holl da wapaat hor Salver gant Herodez, en eul lavaret: « Salud, roue ar farserien ». Herodez a c'hourc'hemen kass Jezuz en

dro da Pilat. Ar bobl, ar soudarded a ia er meaz gantan. Kaifas hag Annas a glask, eur wech c'hoaz, lakaat roue ar Galile, da varn Jezuz d'ar maro. Poan gollét eo! Ar roue diroll a zo mall gantan, da vont da glask eur c'hoari all bennag, hel lakaio da gaout berroc'h e amzer. Ober a ra d'ar Farizianed mont diwar e dro ha pellaat a ra e-unan.

Kerkent e weler Mari, ar gragez santel ha Lazar, o tremen dre ar ru. Holl int glac'haret, holl ec'h ouelont! Rag gouzout a reont, emañ an Hini en deus holl garantez o c'haloun, o vont d'ar maro. Yan a zired, a zaoulin eharz treid ar Werc'hez, a c'houl-len pardoun, da veza bet ken digaloun e liorz Jeth-semani. Per a zeu ive d'ar red, a zaoulin evel Yan, evit goulenn pardoun. « Hen nac'het am eus teir gwech ». Mestr an ebestel eo rannet e galoun. « Gouela a ran hag hen ober a rin, emezan, beteg va maro ». Mari a lavar d'ezan e vezo pardonet, abalamour an daelou e skuilh a ziskouez e garantez gwirion evit Jezuz. « It breman, emezi d'ezan, da gaout an diskibien, d'ar gambr lid ». « Ha petra e lavarin d'ezo, a c'houlenn Per ».

« En deus o mestr muioc'h a garantez evito eget biskoaz ».

IX ARVEST

Jezuz digaset en dro dirag Pilat

Pa zigouez ar servicher da lavaret da Pilat, e teu Jezuz en-dro eus palez Herodez, ha n'eo ket falvezet gant ar roue barn anezan, ar gouarnner a zo nec'het bras. Hag e gwirionez, klevet a rer ar bobl o tostaat, en eur grial: d'ar maro! d'ar maro! hep dale ar Farizianed, ar soudarded, ar bobl a zeu war ar c'hoarilec'h, gant Jezuz. Pilat a glask ober aoun d'ar Juzevien da genta. Poan gollét eo; gwasoc'h int evit bleizi. Evel ne oar penaoz en em denna, e ro urz da skourjeza hor Salver. Sonjal a ra o devezo truez outan, pa welint anezan goloet a wad. Ar bobl a grosmol, a gri muioc'h-mui. « N'eo

ket c'houi, a lavar Pilat d'ar bobl, e fell d'in klevet, rag paet oc'h gant ar Farizianed, evit goulenn maro an den-man ». Ar gouarnner a gass e servicherien dre gear, da c'hervel an holl dud leal d'e lezvarn. Met ar Farizianed ne gollont ket o amzer kennebeut. Lavaret a reont d'ar skribed ha d'ar varc'hadourien, mont adarre da c'houeza tan ar gasoni, e kaloun keariz, rei d'ezo arc'hant, evit ma plijo ganto, d'ar c'houlenn ar frankiz evit Barabbas hag ar maro evit Jezuz. Da c'hedal, e kreiz ar c'hoarilec'h, Jezuz a zo skourjezet, kurunet gant spenn, gwapaet gant ar vourrevien, ar varc'hadourien hag ar soudarded. Jezuz a zo digaset, adarre dirag Pilat, en eur stad truezus meurbet! Ar gouarnner hen diskouez d'ar bobl, en eul lavaret: setu aman an den Kerkent ar Farizianed, ar varc'hadourien, hag ar bobl a gri a bouez penn: « Kasit anezan pell diouzomp, stagit anezan oc'h ar groaz ». Kaer en deus Pilat klask savetei hor Salver, ne glev a bep tu nemet kriadennoù tud gouez o c'houlenn e varo. Koulskoude ar gouarnner n'en deus ket c'hoaz kollet pep fizianz. Rei a ro urz da denna Barabbas eus ar prizoun, d'hel lakaat tal-oc'h-tal gant Jezuz. Ha goulenn a ra: « Pehini anezo e vezo lezet da vale? Barabbas al laer, ar muntrer? pe Jezuz a hanver ar C'hrist? » Ha klevit ar respount spountus: « Roit d'eomp Barabbas, ni a fell d'eomp Barabbas. Ha petra e rin eus Jezuz? Ra vezo staget oc'h ar groaz ». Pilat ar c'hrener en deus aoun, aoun da goll e garg. Lakaat a ra digass dour ha barn a ra Jezuz da vervel war ar groaz, gant ar daou laer Dismas ha Jestas. Joseph Arimathii a rebech d'ezan e varnedigez displeal. Met ar bobl a gri, krenvoc'h evit biskoaz, warlerc'h Kaifas: « Bevet! bevet ar gouarnner! » Pilat a bella, Jezuz a chom gant ar Juzevien a zo o vont raktal d'her staga oc'h ar groaz.



X ARVEST

Hent ar Groaz. — Kan

Gwelomp Jezuz war hent ar C'halvar,
Daoubleget eo dindan eur groaz pounner.
Hen krouer an nenv hag an douar,
' Zo barnet da vervel etre daou laer!

II

Ne glask ket tec'het, evel eun oan,
Sentus eo bet ha sentus e vezo,
Ha n'eus forz peger bras eo e boan,
E sento bepret beteg ar maro.

III

Ar pezh a zamm dreist-oll e ziouskoaz,
A ra d'ezan beza ken drouglivet,
N'eo ket hepken ar pouez eus ar groaz,
Met holl bec'hejou diniver ar bed.

IV

O Salver, lakit en hor c'haloun
Eus ar pec'hed eur gasoni gwirion
Rag n'eus droug nemetan, hen hepken
A jach warnomp malloz, poan da viken.

Ar Werc'hez, ar gragez santel ha Lazar a zeu dre
ar ru, en tu deou; o daoulagad leun a zaelou! o
c'haloun leun a c'hlac'har. Mari eo a frealz ar re
all. En eun taol kount, e weler Yan o tiredek. « Je-
zuz, emezan, a zo bet skourjezet, kurunet gant
spenn, barnet da vervel war ar groaz ». « Va Mab
kurunet gant spenn! Deomp, a lavar ar Werc'hez,
da rei d'ezan eur gurunenn all, kurunenn hor c'ha-
rantez; d'eomp d'ar C'halvar! » Hag evit kaout nerz
kaloun, pedomp. Ha Mari a lez da sevel eus he
c'haloun dinam, unan eus ar c'haera pedennou a

zo bet great biskoaz. « O Tad a zo en nenv. Kin-
nig a ran d'eoc'h, ho Mab Jezuz. Dibabet en deus
an heur-man, evit mervel, ha prena an enjeou. O
Tad santel, ra vezo great ho polontez ». Ar gragez
santel a zo o vont er meaz dre an tu kleiz, pa weler
Jezuz, o tont gant e groaz, dre ar ru en tu deou. Ar-
soudarded, ar vourrevien a zo en-dro d'ezan. Ar
Farizianed hag ar bobl a zeu warlerc'h, en eur
grial: d'ar maro! d'ar maro!

Jezuz a gouez e kreiz ar c'hoarilec'h. Ar gragez
a zired hag a zaoulin en e gichen. Hor Salver a ro-
d'ezo e vennoz. Kregi a ra e dourn e vamm ha la-
varet a ra d'ez: « O va mamm! nag a vad e rit d'am
c'haloun! »

Ar sirenean a zo o vont e kear. Dont a ra dre-
an tu deou, ha red eo d'ezan chom a zav. Evel Je-
zuz a zo kouezet adarre, ha ne c'hell mui dougen
e groaz, ar sirenean a zo lakeat d'hen ober. « Si-
mon, eme Jezuz d'ezan, binniget e vezoc'h, da vi-
ken, hag ho pugale ganeoc'h ».

Pignat a rer warzu ar C'halvar. En eun taol, e
weler eur vaouez o tont d'ar red, o taoulina dirag
Jezuz. Veronika eo, ar vaouez santel ha kalonek.
Adori a ra he Doue hag he Salver. Sec'ha a ra e
zremm a zo goloet a grainch hag a wad. Pellaat a
ra gant he lienen vurzudus, ema warni poltred Jezuz!

Ar zao a gresk, emae tost d'ar C'halvar. Gwel-
et a rer merc'hed Jeruzalem o tont da frealzi Jezuz.
Binniget int gantan. Hor Salver a gouez evit an-
drede gwech. Siouaz! ne c'hell mui sevel. Ar vour-
revien a sko gantan, a stlej anezan er meaz, epad
ma klever ar bobl o krial: « Jezuz d'ar maro, ha
bevet hon tadou! »



XI ARVEST

Ar C'halvar. — Kan

I

Digouezet omp war lein ar C'halvar!
Mab Doue ' ro evidomp e vuez!
D'an daoulin! stouomp holl d'an douar,
Dirag eur merk ker bras a garantez.

II

Sellit! Oh! pebez stad truezus!
E gorf dispennet ha goloet a wad!
Tud! peger kriz oc'h evit Jezuz,
Ho Salver, n'en deus great d'eoc'h nemet vad!

III

E zaouarn gant tachou ' zo treuzet!
Hag e dreid a daoliou morzol flastret!
Drein kalet ar spenn a doull e ben,
Evit Doue! Oh! pebez kurunenn!

IV

Koulskoude e kreiz eur boan ker bras
An dismeganz da veza war ar groaz,
Klevit komzou ho Salver ker mat
« Nan ne skoët ket, truez! truez! va zad! »

V

An dud a vlasfem ' ra gwap outan
Jezuz a bed hag a ginnig e boan!
Eurur eo da bellaat ar malloz,
Da zigeri d'an holl ar baradoz!

VI

Pa vezo tenn, poanijus ar stourmad
Warzu ar groaz savomp hon daoulagad
Hag e kavimp nerz ha sklerijen
Da santelaat pep poan ha pep anken.

Pa zav ar goel, an daou laer a zo war ar groaz.
Emaer o staga Jezuz oc'h e hini. Klevet a rer an
taoliou morzol. Ar c'hantener ha daou soudard a
vir oc'h an dud da dostaat. Ar Farizianed, ar bobl
a zo en-dro d'ar groaz. Ar gragez santel a zo adrenv
gant ar Werc'hez ha Yan. Ar Juzevien ne fell ket
d'ezo, lezel ar soudard da staga ar skrid azioc'h
penn Jezuz, abalamour m'eo skrivet warnan: Jezuz
a Nazaréth roue ar Juzevien ». Met Pilat en deus
gourc'hemennet ha senti a rankont. Ar soudarded
a c'hoari an disou evit gouzout da biou e vezo sae
Jezuz. Chom a ra gant ar pevare.

Klevit goude ar Farizianed, ar varc'hadourien,
ar bobl oc'h ober gwap eus hor Salver, o teuler
dismegans warnan: « Savetei a ra ar re all! ha ne
c'hell ket en em savetei e-unan! » Al laer kleiz a
vlasfem ganto. Met al laer deou a rebech d'ezan
e fallagriez. Peden Jezuz: « Va zad! va zad! par-
donit d'ezo, n'ouzout ket petra a reont! » he deus
gounezet e galoun. Keuz en deus d'e bec'hejou. Pedi
a ra hor Salver da gaout truez outan, pa vezo di-
gouezet en e rouantelez. Ha Jezuz atao ken truga-
rezus da lavaret d'ezan: « Hirio zoken e viot ganin
er baradoz! »

Luc'hed, kurun a zo. Ar bobl a gren. Ar Farizia-
ned a vlasfem. Jezuz a lavar: « Va zad! va zad!
perag ho peus-hu va dilezet! » An noz a deu, ar
bobl en deus aot'n muioc'h-mui hag a bella. P'eo
rouseat an dud, ar Werc'hez a dosta oc'h ar groaz
gant Yan hag ar gragez santel. Annas a ziskouez
kaout eur gasoni ifern oc'h Mamm hor Salver. Je-
zuz a wel e vamm en he zav, etal ar groaz, hag an
abostol en he c'hichen. Rei a ra anezo an eil d'e-
gile, en eul lavaret d'e vamm: « Setu aze ho Mab ».
Ha da Yan: « Setu aze ho Mamm ». Ha breman e
laka e spered, etre daouarn e Dad. « Echu eo va
labour! emezan! ». Mervel a c'hell, prenet eo an
dud, ha mervel a ra.

Ar Farizianed a zo laouen. Krial a reont: « Maro
eo! maro eo! An treac'h a zo d'eomp! » Nan a lavar

Joseph Arimathii, rag « an Hini maro-man eo an holl c'halloudek ». « An den-ze a zo Mab Doue » a embann d'e dro ar c'hantener. Azarias, unan eus ar Farizianed, a zeu d'ar red, da rei d'anaout ar pezh a zo c'hoarvezet en templ. « Ar goel a zo en em rannet dre ar c'hreiz, hag an templ e-unan en deus krenet, evel ma vije o vont da goueza en e boull. Ar reier tro-war-dro a zo frailhet. Siouaz! Kalonou ar Farizianed a zo kaletoc'h evit ar vein!

Joseph Arimathii a ia da gaout Pilat, da c'houlen korf Jezuz. Kaloun hor Salver a zo treuzet gant eun taol lanz. « Oh! a lavar ar Werc'hez: pardonit d'ezo! »

Pilat en deus roet e c'houlenn da Joseph. Kemeret a c'hell ar c'horf hag e sebelia. Diskennet eo diwar ar groaz. Lakeat eo war barlenn Mari. Madalena daol louzou a c'houez vat war an treid, a bok d'ezo. Ar Werc'hez a laka al lienen war tal he Mab. Ha korf Jezuz a zo douget d'ar bez. Epad an amzer e kaner:

I

O Mamm glac'haret! grit d'eomp kompren ho poan!
Pa welec'h ho Mab, lazet evel eun oan!
Evit ma redo ive hon daelou:

Hirio hag hep ehan,
Gant keuz ha glac'har d'hon holl bec'hejou!

II

Mamm madeleus! roit d'ho pugale
Eur gwir garantez 'vit Jezuz o roue,
Ma chomo bepret nerzus o c'hreden

Ha ne raint ken morse
Poan d'ho mab karet 'm eur nac'h e lezen.

XII ARVEST

Dirag ar Bez

Ar soudarded a zeu da ziwall ar bez. N'int ket laouen, nan tamm ebet, d'ober al labour a zo roet

d'ezo. Kerkent ha mar d'int eat en tu kleiz, ar Werc'hez, ar gragez santel, Lazar, Joseph Arimathii, Nikodem a zeu dre ar ru, en tu deou. Beziat o deus korf Jezuz. Ar Werc'hez ne c'hell ket miret da ouela. Veronika a ro d'ezhi he lienen vuzudus evit sec'ha he daelou. Gwelet a rer warni poltred Jezuz. « Jezuz eo », a lavar kerkent ar c'hrouadur Hozael. Ia, eme ar Werc'hez, Jezuz eo. Ha lavaret a c'hell, e gwirionez, d'an holl: « Deuit davedoun c'houi a zo er boan, ha me ho frealzo ». Mont a reont d'ar gambr lid da ziskouez al lienen d'an ebestel, evit o c'hennerzi e kreiz o glac'har hag o anken. En eun taol, e klevet trouz, trouz ar gurun. An eal a zav ar mean bez, hag e goeled ar bez e weler Jezuz, gwisket e gwenn ha leun a vuez. Ar soudarded a zoddallet gant ar sklerijen. Koueza a reont d'an douar. Pa c'hellont sevel e redont da rei d'anaout d'ar Farizianed ar pezh a zo c'harvezet. Madalen, Martha, Salome ha Kleofas a zeu d'ar bez. Souezet-holl int o welet eo goullo. Madalen a ia raktal beteg an ebestel.

An eal en em ziskouez da Vartha, Salome ha Kleofas. Lavaret a ra d'ezo eo Jezuz leun a vuez, hag e vezo en o raok er Galile. Pebez levenez evito! Mont a reont er meaz. Ar soudarded n'o deus ket kollet o amzer. Kavet o deus ar Farizianed ha dont a reont ganto d'ar bez. Gwelet a reont ive eo goullo. Kaifas a zifenn outo komz eus ar pezh o deus gwelet. Rei a ra arc'hant d'ezo ha pedi a ra anezo d'embann dre gear, eo deut an diskibien da laerez korf Jezuz, epad ma oant kousket. Tud diskiant! Madalen he deus kavet Per ha Yan. Dont a reont o zri d'ar bez. Kaloun an daou abostol a drid gant al levenez pa welont n'ema mui eno korf o mestr. Fizians o deus eo beo. Mont a reont raktal da gass ar c'helou d'o breudeur. Madalen a jom. Azeza a ra e kichen ar bez. Gouela a ra dourek. Kredi a ra c'hoaz eo bet laeret korf Jezuz. An eal a deu da genta da c'houlenn diganti perag e ouel kement. Ha kerkent setu Jezuz e-unan, o c'hervel anezi dre

hec'h hano. « Mari! emezan ». Madalen he deus raktal anavezet mouez he Salver. Koueza a ra d'an douar, adori a ra Jezuz. Met hen-man a bella em eun taol kount, « Klevet am eus e vouez, gwelet am eus anezan, a lavar Madalen, pebez levenez em ene! Mont a ran da gass ar c'helou d'an diskibien, leun eo a vuez. Alleluia ».

Ar ganerien, ar c'hanerezed a zeu da gana:

Alleluia

DISKAN

Alleluia

Kanomp breman a galoun, bezomp el levenez!

Rag Salver ar bed

A zo en-dro leun a vuez.

Ha gantan ar maro a zo trec'het

Alleluia! Alleluia!

I

Kaifas, gant eur roc'h bras ho poa stanket e vez,

Ha lakeat en e gichen, ho kwella soudarded!

Met Jezuz, Doue ha mestr ar vuez:

D'an heur merket eus e brizoun ' zo tec'het!

Ho kwarded gant o c'hlezeier

A gouez d'an douar evel maro!

Ha kaer ho peus liva geier,

Jezuz a vev hag a vevo!

II

Meuleudi hag enor d'an Doue Galloudus,

A vev en-dro goude beza marvet war ar groaz!

Meuleudi d'an Doue trugarezus,

'Zoug an dianket d'ar gear war e ziouskoaz!

Met c'houi Juzevien aheurtet

Lakit evez rag kounnar Jezuz!

Ar C'hastiz a vezo spountus!

Ha goude, evit kloza, an holl c'hoarierien ha c'hoarierized a zeu, evit kana gloar ha meuleudi da

Jezuz. Kement a sklerijenn a zo ma vije lavaret e vije staget an heol e-unan azioc'h ar c'hoarilec'h.

I

Gloar d'hor Mestr! d'hor Salver karet

A zo evit an dud, en eur c'hraou ganet!

Dister da welet,

Doue eo bepret

Deut da c'houzanv 'vit ma vezimp diboaniet

D'ezan karantez

Meuleudi bemdez!

II

Gloar d'hor Mestr! d'hor Salver karet,

En deus en eur vervel an holl dud prenet:

Lakeat oa er bez:

Deut eo e buez

Trec'het en deus holl gounnar an droug-spered!

D'ezan karantez

Meuleudi bemdez!

III

Gloar d'hor Mestr! d'hor Salver karet,

En deus 'vit hor c'helen e Iliz savet;

Iliz Mamm dener,

Renet gant Sant Per.

A hench pep kristen warzu an eurusted:

D'ezan karantez

Meuleudi bemdez!

IV

Gloar d'hor Mestr! d'hor Salver karet!

Hirio, da virviken, ra vezo meulet!

D'ezan hon enkreuz,

'Vel hon levenez.

D'ezan hor c'haloun, ha d'ezan hor spered.

D'ezan karantez

Meuleudi bemdez!

EUR GER EVIT PEUR-ECHUI

Karomp ar Groaz, stagomp anezi en hon tiez el leac'h kaera. Dougomp anezi warnomp, war hor feultrin evit santelaat holl lammou hor c'haloun, evit lavaret hep ehan d'hor Salver e karomp anezan, e fell d'eomp beza d'ezan atao. N'eus levr ebet hag a dlefemp digeri ken alies hag hini hor Salver stag ous ar Groaz. An den eurus Albert ar Bras a lavar eo talvoudusoc'h sonjal e Pasion Jezuz-Krist, eget n'eo yun diwar bara ha dour hag en em skourjeza beteg ar gwad. Pasion! Jezuz, eme Sant Bernard, a vruzun ar vein, da lavaret eo, ar bec'herien kaledet. Nan, n'eus ket gwelloc'h skol, eget skol ar Groaz evit mont da zant.

Sonjomp eta alies er poaniou a c'houzanas Jezuz evit hor silvidigez hag unanomp hor re gant e re, bepret ha bemdez.



Ar Basion a vezo c'hoariet e Kastel :

D'ar zul 23 a viz meurz: da 3 h. 1/2.
D'ar zul 30 a viz meurz: da 3 h. 1/2.
D'ar zul 6 a viz ebrel: da 3 h. 1/2.
D'ar yaou 27 a viz meurz: da 8 h. noz.
D'ar yaou 3 a viz ebrel: da 8 h. noz.

E Pleyben e vezo c'hoariet ar Basion :

D'al lun ha d'ar Meurz Fask.
21 ha 22 a viz ebrel: da 2 h.

Plas kenta fermet: 10 lur; Kenta plas: 7 lur; Eil plas: 20 real; Trede: 1 skoed.

Mat e vije kemeret ar billiji eur pennad araok.
Kavet e vezint en tiez-man:

COCAIGN, Place-au-Lin; KERVELLEC, Grand-Rue; LE GALL-SAOUT, Grand-Rue.

Lakit evez mat: D'an dervez a vezo merket war ar billed e tleit dont da welet ar Basion.
Evelse e vezo urz ha plas evit an holl.

